

# Beaj

## Bro Warok ur vag kozh evit Haiti

Bro warok o vont kuit betek Haiti evit sikour an dud

**Aet eo kuit ar vag Bro warok gant 4 martolod, marteze disheñvel met gant ar memes paj : sikour tud Haiti o deus ezhomm anezho. Penaos ? Perak ho deus bet c'hoant ober ar veaj-se ? Ar vuhez war ar vag, ar raktres...**

Bro Warok o vont kuit evit Haiti



## Raktres ar veaj :

Aet eo kuit ar vag eus an Orient evit mont betek enez Kanariez goude mont betek ar Gwadeloup ha goude erruout e Haiti. Mont a reont du-se evit sikour an dud hag ar vugale, kas traoù ha chom emren war un dro, da skouer gant ar greun hadet dezho, e c'hellint goude debriñ ar frouezh ag ar greun o devo plantet ... Goude ur pennadig bihan war an enezenn e tistroint en ur dremen dre an Azor, ar Bermud ha goude distreiñ d'an Orient.

## Ur pred mat-tre :

N'eo ket aes bemdez bevañ war ur vag e-pad ouzhpenn 4 miz, rak debret e vez tost bepred ar memes tra met eürusamant e vez pesketaet ganto. Rak e-pad un devezh o deus kroget ar vartoloded da besketa ez eo bet tapet ur pesk bras, un « daurade coryphène », hag a-drugarez d'ar pesk-se o deus gallet debriñ ur pred disheñvel ha d'am sonj gwelloc'h.

## Ur c'hoari gant ur pichon :

Ur pichon beajer a zo chomet a-sav war Bro Warok sur a-walc'h peogwir e oa skuizh gant ar veaj en doa graet, kontant-tre e oa ar vartoloded kaout ul loen er vag, bouetañ a reont ar pichon bemdez ha klask a reont da biv eo ar pichon, en ur c'hortoz gouzout da biv eo ar pichon e vezont eürus-tre.

Aziliz Boulic, Aziliz Cobac, Lenaig Couedel ha Lucille Hayere

D'ar 4 a viz Ebrel 2012